

— 5 —

Gret a bemzec boquet Ros fleurissant er Barados.

Rouanes ha Guerc'heset, ha guir Vam da Zoue beo,
Pedet evidomp betec ar maro, evit ma vezimp pardo-
net,

Ma c'hallimp mont da repos, ha d'ho meuli er barados.



CANTIC TRUESUS,

*Evit rei squer d'an Tadou ha d'ar Mamou da
instrui o Bugale deus ar maleuriou arruet en
ur Vilagen etre an Naonet ha Paimbœuf.*

Voar ton Santes Genovefa.

ME ho supli, Speret-Santel,
Da rei speret a lumier,
Da ziscleria d'ar Vretonet,
Pevar maleur bras arruet.

Er memes devez en un Ty,
Horrol ha spont eo compreni,
An Tad hac ar Vam a so beuzet,
Ha daou Grouadur so lazet.

Disquit-y Tadou ha Mamou,
Ma c'hinstruot ho pugaligou,
Evit dional dre guemense
Na rac'h drouc ebet dirase.

Rac ar Vugale so mechant,
Malin en amser a squiant,
Diminui a ra ar santeles,
Cresqui a ra ar fallagries.

Un ozac'h er goan tremenet,
Hep ma songe e drouc ebet,

— 6 —

En em laquas da sivoada,
Ur Penmoc'h en devoa o larda.

Goude ma en devoa quempennet,
En instant int bet sortiet,
Da ober e servich pep hini,
Ar Vugale a chommas en ty.

Ur Potric en oat a seiz bloas,
Pa voa sortiet e Dud er meas,
En devez quemeret ar gontel,
Da laza e Vreur a voa er c'havel.

En e c'houzouc en e flancas,
Hac e zigueri a songeas,
Evel m'en devoa remerquet
Penaus oa ar Penmoc'h digoret.

Pa edo o songeal e zigueri,
E sant e Dad o tont d'an ty,
Hac en mont buan da lavaret,
Ma zad, va breur am eus lazet.

Gant cals a spont ous e glevet,
E Dad a chomas estonet,
En e galon an huanat,
An daëlou en e zaoulagat.

Semplat a vennas gant melconi,
O velet rus glaou leur an ty,
Gant ar goat en devoa scuillet
E Grouadur a oa lazet.

N'ellas quet en em arreti,
P'er guelas d'en em goleri,
Sioas eguile a lazas,
Dre brontitud gant un taol bas.

Hac en so den var an douar,
A alze compren e c'hlac'har!
O velet e zaou innoçant

— 7 —

Lazet, troubla a re e santimant.

Ne oun quet penaus e c'hallas flach,
Na ran e galon var ar plaç,
Ne ouie petra da ober.

Sioas mont a ra e disesper.

Eleac'h souffr gant patiantet,
Evel pa vige trelachet,
E quemeras ur faltasi

Hac ez eas er mor da veuzi.

Pa edo o vont e cavas e Vroec,
Hac e deus outàn goulennet,
Pelec'h e zit-hu, va Friet,
Meurbet ho quelàn contristet?

Mont, a ràn, emezàn, en ur bale,
Allas tristaat a reot ive,
Var ar guer-se e tispantias,
Sioas er Mor en em dolas.

Ar Vroec paour-mâ en Ty pa antreas,
Teir pe bedir gueich e semplas,
O velet he daou Grouadur
Lazet, pebes displigeadur.

Piou eo an hini a alfe exprima,
Glac'har hac anquen ar Vroec-mâ,
O velet leur an Ty rusiet
Gant ar goat eus he innoçantet.

Ne oun quet penaus er plaç ne varvas,
Cousgoude e devoa ar gourach,
Da vont da clasq he Friet,
O songeal clevet ar sujet.

Penaus oa ar maleur arruet,
Ma oa he daou Grouadur laset,
Er Mor er guelas o veufi,
Ma zeas da glasq e savetei.

— 8 —

Lamet a reas hep complimentant,
 Ebarz ar Mor en un instant,
 Evit gallout sicour he Friet,
 Allas o daou e voant beuzet.

Pevar maleur truezus bras,
 Mar boe jamæs clewet biscoas,
 Guelet en ur pennat dervez
 Dstruget Tud un tieguez.

An ty a gren so abandonet,
 Allas an Dut so perisset!
 An Tad hac ar Vam so beuzet,
 Hac ar Vugale so lazet.

Tad ha Mam ha c'hui Bugale,
 Profitit eus a guement-se,
 Evit divoal eus ar maleuriou,
 A ra cals a Vugaligou.

Gant an tân pe e meur a façon,
 Pa vent leset en abandon,
 Lies a veich ec'h erru goall
 Pa na chom o zut d'o divoall.

Profitomp a pevar maleur,
 Ma raï deomp tec'het diouz danger,
 Ha pedomp evit hor Salver,
 D'o receo er gloar eternal.

FIN.

E QUEMPEL, eus an Imprimiri E. BLOT, mab.